

## KIS-685 – Ar Stad hag an nit

(RLN da GC – 24 06 00)

Diouzh ar c'hiz eo tagañ Roparz HEMON er mare-mañ, n'eo ket hepken e Breizh, met ivez war un darn da nebeutañ eus ar wask c'hwec'hkognat. Teurel a c'haller ar bec'h, ha gant gwir abeg a dra sur, war an hengoun hag ar speredegzh jakobin. Hogen ouzhpenn ez eus, da 'm meno. War bevare pajenn golo e oberenn *Les Maîtres Penseurs*<sup>1</sup> e skriv André GLUCKSMANN, oc'h ober un diverrañ eus divoud al levr : “Ar familh en he fezh a bled gant ar politikerezh. An hini henañ, Johann Gottlieb FICHTE, a dremene da jakobin — un danvez LENIN ? HEGEL [...] a ginnig dont da vezañ sujer ha piaouer n'eo ket hepken d'an natur (doare DESCARTES) met d'ar gevredigezh. Ha NIETZSCHE, e berr : ar vestroni war an douar. N'eo ket da zinac'h.<sup>2</sup>” Merkomp ne gomz ket amañ GLUCKSMANN eus MARX a zo evitañ koulskoude ezel ivez eus “familh” ar “Bennveizourion”, eleze eus ar re o deus roet o diazezoù kealiadel d'ar Stadoù arnevez, d'ar re hollveliekañ pergen.

Hag un tammig pelloc'h e lenner : “Ar familh a ziena eo divezus Mae 68. Ha darsav an Amerikaned yaouank. Ha harzerezh ar Rusianed o skrapañ PINOCHET war-benn e eskemmañ ouzh BREJNEV.<sup>3</sup>” Arabat ankouaat en deus GLUCKSMANN embannet e levr e 1977, eleze a-raok dispennadur Moger Berlin : diwezhañ frazenn an arroud emañ o paouez menegiñ a ra dave da zidoullbac'hadur ar bleiniad komunour chileat Luis CORVALAN gant PINOCHET e 1976, evel gourzhtu da zieubidigezh an nagenner soviedat Vladimir BOUKOVSKI gant BREJNEV, ha kement-se da heul ur c'hevraouiñ luziet kenan.

---

<sup>1</sup> Grasset & Fasquelle, 1977

<sup>2</sup> “Toute la famille fait dans la politique. L'aîné, Johann Gottlieb FICHTE, passait pour jacobin — un futur LENINE ? HEGEL [...] offre de devenir maître et possesseur non seulement de la nature (style DESCARTES) mais de la société. La domination de la terre, résume NIETZSCHE. Ça ne se refuse pas.”

<sup>3</sup> “La famille prouve que Mai 68 est impossible. Et la révolte des jeunes Américains. Et la résistance des Russes qui kidnappent PINOCHET pour l'échanger contre BREJNEV.”

Tu a vefe avat da genderc'hel ha da skrivañ : “Ar familh a ziena eo divezus *Gwalarn*. Hag ar brezhoneg arnevez.” Daoust da freuzadur Moger Berlin e chom kreñv c'hoazh levezon ar familh. Robert HUE da skouer ned eo ket GREMETZ (pezha ro an dro da hemañ da gaout, a briz izel ur staelad a nagenner e diabarzh ar Strollad) ; met pa zezrann tremened stalinour ar PCF en e levr *Communisme : la mutation*<sup>1</sup>, ne gred ket menegiñ ar feur emglev alaman-soviedel eus 1939<sup>2</sup>. N'ouzon ket pehini eo meno GLUCKSMANN war argraf ar brezhoneg, hogen diouzh poell e levr e ve aes dienaat ivez ez eo *Gwalarn* hag ar yezh arnevez traoù anreoladus hag anevezhiadus mik evit ar Stad c'hall<sup>3</sup>. Padal, ar skolioù *Diwan* o deus asantet bezañ reolet gant ar Stad : ne vern penaos n'o doa ket da zibab. Ha dre zegouezh eo ma n'eus koulz lavarout ezskoliad ebet eus *Diwan* oc'h ober gant ar brezhoneg evel yezh labour ? Ne vennan ket lavarout eo didalvoud an aozadur-se : er c'hontrol, e ra berzh e skolidi er vachelouriezh. Met ne c'haller ket sellout *Diwan* evel ur saviad kenderc'hañ gwirion. Evit gwir, Roparz HEMON a emgav taget hiziv an deiz kalz nebutoc'h evel ambilher ur skinva roazhonat e-pad ar Gouzalc'h alaman eget evel krouer ur saviad kenderc'hañ brezhonek e-maez krap ar Stad c'hall penn da benn.

Ha ne c'hallfed ket ivez klozañ ar bajenn-se gant GLUCKSMANN dre : “Ar familh a ziena eo divezus an nit” ? An hini a roe da c'houzout un deiz da GE ne selle ket keal an nit evel perzhek, daoust ha n'eo ket dre ma kave ne oa mui aotreet dezhañ lakaat en arvar ar c'hentreadoù bet goveliet gant ar “Bennveizourion” ?

## STAGADENN

(RLN da AAB – 12 04 00)

D'ar 05 04 00 e 'z poa kaset din al luc'heiladoù eus daou bennad deuet war *Libération* ar 16 03 00 diwar-benn ar Mouvement breton (ent resis dreist-holl a-zivout bandennoù

---

<sup>1</sup> Stock, 1995.

<sup>2</sup> Robert HUE a bleustr war marevezh stalinour ar Strollad komunour gall dreist-holl er chabistroù “Stalinisme : la cicatrice encore brûlante” (pp. 95-116) ha “« Soufflez sur les charbons »” (pp. 117-129). Ur c'hraf pouezus : er chabistr “Un courant qui vient de profond et de loin” (pp. 51-71) e tistaol an aozer keal an hevelepted etre sokialouriezh ha gouezoniezh, da lavarout eo e troc'h krenn aze diouzh ar “familh”. (Hag en deus GREMETZ graet an troc'h-se ? N'eo ket sur.)

<sup>3</sup> A-zivout kealioù an “anreoladusted” hag an “anevezhiadusted”, sl. ar stagadenn d'an notenn-mañ, er pajennoù da heul.

treset Reynald Sécher). Tu bennak war unan eus an daou bennad-se e oa bet graet anv eus enepyuzevouriezh Youenn Drezen. Respontet 'm boa dit d'ar 07 04 o lavarout e oa arabat bevennañ argraf an enepyuzevouriezh da zegouezh personel Youenn Drezen, hag e oa dav studiañ an anadenn e par kevredigezh c'hall an Etrebrezel en he fezh. Digewer eo kuzhat enepyuzevouriezh Youenn Drezen, nemet eo ken digewer all ober eus ar gwariadur-se un dro dibarek dezhañ hag erziwezh klask aze ur sigur da zivrudañ ar paotr.

Zeev Sternhell en deus diskouezet e oa bet an enepyuzevouriezh ur redenn gealiadel kreñv tre e kevredigezh c'hall an Trede Republik adalek mare ar voulañjouriezh. Mar boe avat e Frañs ken abred hag er bloavezhioù 1880 amveziadoù lañsus d'an enepyuzevouriezh, e oa ledet neuze ar ouennelouriezh-se da Europa en he fezh<sup>1</sup>. Gouez da André Glucksmann, ne c'haller ket disrannañ savidigezh ar Stadoù europat arnevez ha diorreadur an enepyuzevouriezh en 19<sup>t</sup> kantved. Daveiñ a ran d'ar pp. 117-123 eus e levr *Les Maîtres Penseurs*, ma striv da lakaat a-wel al liamm etre an div anadenn. Ne gav ket din eo fall e zezrannerezh, daoust ma chom diglok moarvat, rak grez diazevidigezh ar Stadoù arnevez zo bet ivez hini ar Reverzhi c'hreantel, ha ne rann grik Glucksmann diwar-benn houmañ. Ha neoazh e voe da skouer al luskad boulañjour un disoc'h war hir dermen d' ar greanteladur herrek kaset e-pad an Eil Impalaeriezh : n' eo ket souezh e souprenas bleinierion republikan ar mare, anezho tud prientet fall a-walc'h da bleidiñ gant kudennoù ar bed greantel. N' omp ket rediet kennebeut da zarbenn pezh a haer Glucksmann pa skriv, oc'h enebañ emzalc'h ar Stadoù frankizek ouzh hini ar Stadoù hollveliek : “Sioulikoc'h he deus Europa frankizek klasket enteuziñ ha reolata, ar gouennlazh sevenadurel o vezañ erlec'hiet ouzh ar gouennlazh korfel.”<sup>1</sup> Arabat eo marteze komz re vuan eus gouennlazh sevenadurel : ni a oar eo kalz kempleshoc'h eget se an divoud. Se lavaret, he dije ar frazenn graet plijadur vras da arvalion Kafedi ar

<sup>1</sup> Mar karezer enepyuzevouriezh Youenn DREZEN, penaos neuze na ziskuliañ garv hini DOSTOIEVSKI pa gomz hemañ (liz da GLUCKSMANN, *Les Maîtres Penseurs*, p. 119, eil kevarad), a-zivout ar Yuzevion, eus “freuz stal buhezel dieiltro” (“faillite morale irrémédiable”) ha zoken eus “peurvanktorr denel” (“banqueroute humaine totale”) ? Goude ur freuz stal ez eus tu marteze da saveteiñ traoù 'zo, hogen war-lerc'h ur peurvanktorr n'eus mui an disterañ goanag da gaout. Diaes kas pelloc'h eget DOSTOIEVSKI an dispriiz ouzh ar Yuzevion.

Emañ al “labour a eñvor” da vezañ kaset e par ar gevredigezh c'hall en he fezh, ha n' eo ket hepken en amgant al luskad broadelour breizhat. Ha war a hañval o devez ar Frañsizion ar rukun brasañ oc'h ober al labour-se, pa soñjer da skouer en diaesterioù bras he deus bet Annie LACROIX-RIZ da embann he studienn diwar-benn keveleriezh armerzhel ar bankoù hag ar c'hevredadoù greantel pennañ eus Bro C'hall e grez ar Gouzalc'h (sl. La-13, pp. 44 hh.). Ur oueskadenn n' eo ken a du 'rall menegiñ enepyuzevegezh Youenn DREZEN hep komz eus hini ur bern skrivagnerion ha kfredourion c'hall eus ar mare ha zoken, en un doare donoc'h, diskuliañ pouez an enepyuzevegezh e kevredigezh c'hall an Trede Republik. Hag eñ ezel eus *Gwalarn*, e oa evelkent eus Youenn DREZEN un dedaolad eus an kez kevredigezh.

<sup>1</sup> “L'Europe libérale a voulu plus calmement assimiler et normaliser, le génocide culturel se substitue au génocide physique” (o.m., p. 119).

C'hi broadelour<sup>2</sup> : ur banne, ha moarvat meur a hini, o dije kinniget da Glucksmann gant jourdoul !

(RLN da YBAN – 17 04 00)

Skrivet 'm eus dit c'hoazh, pellik 'zo bremañ, a-zivout un argraf hor boa graet meneg anezhañ un deiz e ti YBQ : perak eo bet an enepyuzevouriezh ur ouennelouriezh kalz pouezusoc'h en istor eget ar gouennelouriezhoù all ? Perak ez eus bet eus ar Yuzevion a-hed ar c'hantvedoù ur bihanniver kalz muioc'h en ardizh eget ar bihanniveroù all ? Klasket 'm boa digejañ arbennoù o tennañ d'ar c'henniñvoù etre Yuzevion ha Kristenion ken abred hag er bloavezhioù kentañ goude marv ar C'hrist, hag ivez arbennoù liammet ouzh diorreadur an darwinouriezh kevredadel en 19t hag en 20t kantved. Evel just ne 'm boa graet aze nemet desellout arvezioù 'zo eus an argraf. Un arvez all, deurus kenan, 'm eus kavet studiet gant André Glucksmann war bajennoù 117-123 e levr *Les Maîtres Penseurs*.

Er pajennadoù-se e striv Glucksmann da lakaat a-wel al liammoù a voe en 19t kantved etre savidigezh ar Stadoù arnevez hag an azlañs roet neuze d'an enepyuzevouriezh. Ne gavan ket fall e zezrannerezh. Mar heuliomp Glucksmann, e voe moustret ent dibarek ar Yuzevion e kement ma oa anezho ur stroll war un dro anenframmadus hag anevzhiadus. An anevzhiadusted zo moarvat pouezusoc'h eget an anenframmadusted, rak anenframmadus eo ivez goude holl ar glaskerion vara, met aes tre da evezhiañ gant ar bolis : ne c'hellont e nep doare bezañ un arvar evit ar Stad<sup>1</sup>. Ar stroll yuzev avat a zo diaes kaout krap warnañ, en arbenn eus e istor, e zistaol eus ar gristeniezh, e stuzegezh, e live deskamant, e ledadur e par ar blanedenn a-bezh, h.a. Pimpatrom ar bihanniverad disuj hag arvarus eo enta ar Yuzev : “An devec'hied eus kement zo da zistrujañ eo ar Yuzev.”<sup>2</sup> Ha n'o doa ket Hebreiz lakaet Egipt ar Faraoned en argoll, evel m' en skriv Schiller e unan, e grez Moizez endeo ? Nebeut ouzh nebeut e c'hell ar Stadoù arnevez arverañ ouzh ar Yuzevion an enepyuzevouriezh kristen kozh, dre ma 'z a levezon ar c'hravezioù war zisteraat adalek an 19t kantved. Bezomp dinec'h koulskoude : ideologiezhoù ar Stadoù a emled e-touez o foblañsoù ketep ; an den war ar straed ned aio ket ken da rebech d' ar Yuzevion kroazstagadur ar C'hrist, nemet e vo feuket da skouer,

evel Hitler e-doug e yaouankiz en Aostria, gant o blev re hir ha re zu

(pe gant un dra all). Met nag ur bevez d' ar Stadoù pa 'z eo chomet an enepyuzevouriezh kravezel kreñv a-walc'h evit degas un harp galloudek d' an enepyuzevouriezh arnevez !

---

<sup>2</sup> Kafedi eus karter Montparnasse darempredet gant ar vrogarourion vrezhon er bloavezhioù c'hwegont ha seikont. Al “labour a eñvor” a angorzh arvalion an holl gafedioù eus Frañs, ha n'eo ket hepken re Kafedi ar C'hi broadelour !

<sup>1</sup> Gorreomp evelkent en doa staget renad Vichy da vac'hañ ar glaskerion vara e-barzh kampoù.

<sup>2</sup> “Le Juif est le concentré de ce qu'il faut détruire” (o.m., p. 122).

A hent all e tiskouez Glucksmann ez eo dedalvezadus da zegouezh an Armeniz pezh a skriv diwar-benn ar Yuzevion. E 1915 eo e c'hoarvezas ar gouennlzh armeniat, eleze — ha n'eus netra dargouezhek aze — un nebeut bloazioù goude m'o doa an “Durked-Yaouank” diskaret ar Stad turk kozh o sevel d'ar Grennamzer ha lakaet en he lec'h unan arnevez. Hogen diouzh savboent ar vleinierion nevez e oa eus an Armeniz ur stroll anenteuzadus ha (gwasoc'h !) anevzhiadus : “O bezañ, ha pa na ve ken, a zevoude un tachad divoull en egor treuzwelus an uhelevezhierz<sup>3</sup>” (p. 122). Arabat ankouaat e c'hoarvezas ar gouennlzh-se e-pad ar Brezel bed kentañ : intret don e veze neuze pobloù Europa gant an ideologiezhoù broadelour. E Frañs da skouer e oa bet prientet an Digoll dekvloaziadoù pad. Darev e oa enta Europiz da “gompren” abegoù ar Stad turk. Gouez da Glucksmann e kavas houmañ un difenner gredus e Pierre Loti. “Ur munud

!

” en dije diskleriet Le Pen mar bije bet d' an ampoent-se e penn an dehou pellañ gall. Hitler e unan a lavaras diwezhatoc'h : “Piv en devez koun hiziv an deiz eus dispeuzadeg an

Armeniz

?

” ha dav anzav e ouie mat tre pezh a ezgerie.

Hag eñ skedus, e van diglok mat dezrannerezh Glucksmann. Hañvalout a ra ankouaat an ereoù kreñv a voe etre diazezidigezh ar Stadoù arnevez hag ar Reverzhi c'hreantel. Bismarck da skouer en deus gallet sevel un unstad evit Alamagn dre ma oa bet unanet houmañ endeo dre ar rouedad hentoù houarn, an eskemmoù armerzhel, an emglevioù maltoutel. Ar Reverzhi c'hreantel a voe evit kalzik Yuzevion an dro d'un herouezadur kevredigezhel herrek, pa dremenjont a-barzh ur remziad, pe un tammig ouzhpenn, eus ur saviad a genwerzhourion hag a astennerion arc'hant arlezat pe arlezatoc'h d' an hini a gevalourion c'halloudek ha levezonus<sup>1</sup>. Peadra enta da nec'hiñ kalz muioc'h c'hoazh an holl re a wele er bihanniveroù yuzev un arvar evit o riezoù. Seul vui ma oa eus an herouezidi nevez tud didouchadus : kalz diaesoc'h da skouer drouklazhañ ur bankour bras yuzev (ar marvgosp emichañs !) eget ur marc'hadour red yuzev war ribl an hent (un afer houmañ na vije ket bet ar flied marteze dedennet ganti zoken). Ne vern penaos, ne chomas ket amparadur ur vourc'hizelezh vras yuzev hep bezañ merzhet ; sokialourion anvarkour an 19t kantved a santas an ezhomm bezañ enepyuzev<sup>2</sup> (seurt gwariadur a dizhas ivez en devoud ar varksourion) ; ha faskourion an 20t kantved a ouezas korvoñ

<sup>3</sup> “Leur présence seule constituerait une zone opaque dans l'espace transparent de la haute surveillance” (o.m., p. 122).

<sup>1</sup> E Frañs e c'hoarvezas kement-se en taluad o vont eus frankizadur ar Yuzevion gant ar Vodadenn Vonreizhañ da Unpenniezh Gouere.

<sup>2</sup> Un alberz a ro GLUCKSMANN eus enepyuzevouriezh PROUDHON.

en un doare ampart al liammoù beziat a oa etre ar sokialouriezh hag an enepyuzevouriezh.

N'omp ket rediet kennebeut da zarbenn pezh a haer Glucksmann pa skriv, oc'h enebañ emzalc'h ar Stadoù frankizek ouzh hini ar Stadoù hollveliek : “Sioulikoc'h he deus Europa frankizek klasket enteuziñ ha reolata, ar gouennlazh sevenadurel o vezañ erlec'hiet ouzh ar gouennlazh korfel.” Hag eñ zo bet evit gwir eus ur gouennlazh sevenadurel en taredoù angallek eus Frañs ? Abaoe pell e ouzomp ez eo an argraf kalz kempleshoc'h eget se. Gwechall e tegouezhas din kevout Armand Kervel, ezel eus *Ar Falz* ha kuzulier kêr sokialour eus Brest<sup>3</sup>, o komz eus “gouennlazh sevenadurel” a-zivout Breizh. Met ar paotr ned eo bet biskoazh un dave. Keuziusoc'h eo avat gwelout an dodenn-se arveret gant Glucksmann : e levrioù a dizh kalz muioc'h a lennerion eget kelaouenn *Ar Falz*.

---

<sup>3</sup> Daoust m' edod neuze kent dilennadegoù dinazel 1977, ha n'eo ket sur e oa kuzulier kêr d'an ampoent.